

SANT GWENNOLE

DISKAN

Sant Gwennole, meulet tro-dro,
Klevit ganeomp pedenn ar Vro,
Sant Gwennole, bleunienn hor Breiz,
En hor c'halon magit ar feiz.

I

Eus ar pec'hed war ho kavell
Morse ne c'houezas an avel.
Pedi Doue, c'hoaz krouadur,
A oe dalc'hmat ho plijadur.

II

Diwezatoc'h, e barr an oad,
War lez ar mor, e skeud ar c'hoad,
Doue bemdez klasket ganeoc'h,
En hoc'h ene a skuilh e beoc'h.

III

Et da vanac'h, kerkent e par
War ho tal eur vertuz dispar.
Et da veleg, ho komzou fur
A jach ar bobl war an hent sur.

IV

El lec'hioù-man, eun deiz galvet,
Breiziz eleiz ho peus salvet.
Ho pinienn, ho pedennou
O c'hounit deoc'h a vandennou.

V

Tamall a rit gant nerz kalon
O gwall vuhez da dud Grallon
Ha ma o dije sentet holl
Ne vije ket et Iz da goll.

VI

Burzadou kaer a-wel d'an dud
Dreist harzou Breiz a gas ho prud
Hervez ho c'hoant Doue a ra
Hag ouzoc'h ne zinac'h netra

VII

Kenvreur ar Zent hag an Elez
Diskouezit deomp ho madelez.
Plijet ganeoc'h, Sant a garomp,
Kaout en nenvou sonj ac'hanomp.

J. L'Helgoualc'h

O. M. I.

